



BN3-3-020



Eun dibab Kantigou

gant an Tad BARNABÉ, Kapusin

AR SILVIDIGEZ

Ton : *Lez-Breiz.*

- 1 Klevit, kristenien, klevit gant evez
Kental dalvoudus ar Silvidigez (bis).
- 2 Kalz a gemer poan gant enor hag aour,
Hag a zo dichal gant o ene paour.
- 3 Gant ar blijadur kalz a zo dallet,
Ha gant o ene n'int morse nec'het.
- 4 Eun dra koulskoude a vo ret ato :
En em savetei kousto pe gousto.
- 5 'N eur goll hoc'h ene c'houi a goll pep tra,
Ha re zivezat e vo d'eo'h lenva.
- 6 Jezuz a larav : « Dreist an holl vadou,
Klaskit da genta tenzor an nenvou.

- 7 Petra dalv d'an den gounit ar bed-holl,
Ma lak e ene da vont d'en em goll.
- 8 Me 'm eus ho prenet, neket gant arc'hant,
Met, gant va holl gwad skuilhet dizamant.
- 9 Me 'm'eus evidoc'h, gouzanvet ,er groaz,
Poaniou strafuilhus, 'vel n'eus bet biskoaz.
- 10 Ma fell d'eoc'h eun deiz kaout ar gwir vuhez
Heuilhit ya lezenn hep klask digarez.
- 11 Heuilhit kalonek an hent rust ha moan :
Rak e-leiz a gerz dre an hent ledan. »
- 12 Selaouit hirio komzou Mab Doue,
Ha diwallit mat da goll hoc'h ene.

AR MARO

Ton : *Deomp d'ar garnel.*

- 1 Selaouit holl, kristenien, selaouit mat hirio
Ar c'henheliou talvoudus a ro d'eoc'h ar maro ;
Ma soujit piz er maro, c'houi a vezò nerzus
Da stourn atao kalonek ouz ho techou noazus.
- 2 An den a oa bet krouet 'vit beva da viken,
Hep kaout mörse da danva gwin c'houero an anken;
Met, kerkent ha ma kouezas e lagenn ar pec'her,
Eo bet, siouaz evitan ! d'ar maro kondaonet.
- 3 Embannet eo ar setans : an holl a die mervel,
Ar paour hag ar pinvidig, ar mestr hag ar mevel,
Ar c'hoziad hag ar bugel, ar sant hag ar pec'her,
An holl a vo diskaret gant an Ankou falc'her.
- 4 An Ankou 'zo hep kalon, bouzar ha dall ha mut,
Ha dont a ra diarc'hen, didrouz betek an dud.
Eman noz-deiz o redek dre bevar c'horn ar bed,
Ha, gant e falc'h didruez, e sko, e sko bepred.

- 5 Klevit breman, gant evez, komzou Jezuz ho Preur:
« N'hellit gouzout, emezan, nag an deiz nag an eur.
Pa sonjoc'h an nebeuta e teuio an /Ankou.
Hag ho sammo dizamant, en despet d'ho taelou.
- 6 Eur strafuilhus ar maro a sono hep dale :
Ho korf a vo astennet, sklaset, wär ho kwele.
Goude, pa vo diskennet e toull du ar wered,
Ne vo nemet breinadur, preiz euzus ar prened.
- 7 Sonjit ervat, mignonid, ar vuhez a zo 'ber :
Eürus, mär he zremenit, stouet war ho tever,
Rak ar maro evidoc'h ne vezò ket spontus :
Hoc'h ene glan a nijo da varadoz Jezuz.
- 8 Met, ma renit eur vuhez digabestr ha distur,
O terri lezenn Doue, o kutuill plijadur,
Na c'houi a vezò spontet, pa zeuio an Ankou
Da rei d'eoc'h taol ar maro e-kreiz ho tizurziou !
- 9 Bezit eta skiantek, ha na lavarit ket :
Warc'hoaz, varc'hoaz me 'dec'ho diouz fallentez ar bed
Warc'hoaz a vo martexe ho tervez diveza,
Hag ouz holl draou an douar c'houi 'ranko kimiada.
- 10 Labourit hep ehana, keit ha ma pad an deiz :
Dont a ray noz ar maro, ha neuze, tudou keiz,
Ho puhez a vo Klozet ; n'helloc'h mui labourat.
Setu kentel ar maro : sonjit enni ervat.

AR VARN GENTA

Ton : *Petra 'zo nevez e Kêr Is.*

- 1 Spontus meurbet eo ar maro,
Hag e galir a zo c'houero ;
Spontusoc'h c'hoaz eo mont goude
Evit ar varn dirak Doue.

- 2 Aman 'vidomp, 'hed hor buhez,
Eman amzer an drugarez :
Ar falla deti, gant keuz gwirion,
A c'hell bepred kaout ar pardon.
- 3 Met er béd all, taolomp evez,
Lez-varn Doue 'zo didruez,
Ha ma varvomp en eur stad fall,
Pardon ebet n'eus da c'chedal.
- 4 Pebez anken hor strafuilho,
Pa vimp ionket gant ar maro,
Pa vo demdost ar Barner striz
En hor c'halon da furchal piz !
- 5 Pep tra fallakr a zispako,
Pep tra kuzet a ziskuilho.
Ne vezo ket eur falloni.
Hag a c'hello chom hep kasti.
- 6 Petra, pec'her, a lavarin ?
Da va difenn piou a c'halvin,
Pa n'hello ket chom hep krena
Memes an den ar sanctela ?
- 7 Roue a c'hoar galloudus-holl,
N'am lezit ket da vont da goll.
C'houi eo feunteun ar vadelez,
Bezit eta ouzin truez.
- 8 O vont d'am c'hlask oc'h 'n em skuizet,
Hag azeza hoc'h eus ranket ;
'Vit va frena oc'h bet er groaz :
Na gollit ket poaniou ken bras.
- 9 Barner leal, spont ar pec'her,
Pardonit d'in, o va Salver,
A-raok ma teuy an Ankou dall
D'am strinka yud 'barz ar bed all.

- 10 D'ar Vadalen c'houi 'bardonas,
Pedenn al laer c'houi 'selaouas ;
Rak-se d'am zro me a esper
Ho pô truez ouz eur pec'her.
- 11 Va fedennou 'zo didalvez,
Met c'houi zo leun a drugarez ;
Grit, me ho ped, o va Jezuz,
Na zevin ket en tan padus.
- 12 Ya, me ho ped, leun a c'hlac'hар,
Va zal a-stok ouz an douar,
Grit na vin ket gant ar bouc'hed,
Met en nenvou gant ho tenved.
-
- AR GONTRISION
- Ton : *Ar chas a glevan. (Barzaz Breiz, XXIX)*
- 1 Dirak ho kroaz, o va Salver,
En em daolan d'an daoulin ;
C'houi 'zo bepred dous ha tener :
Sellit a-druez ouzin.
Eus fallenteziou va buhez
Me 'zeu da c'houlenn pardon,
Ha da c'houlenn kaout, a-nevez,
Dor zigor en ha Kalon.
- 2 Bete vreman, re allies,
Va glac'hар d'am fec'hejou
N'eo bet, pa vezen o koves,
Nemet war va muzellou ;
Hirio ayat, Salver karet,
C'houi wel va c'hontrision,
C'houi wel va c'halon bruzunet
Gant keuz ha glac'hар gwirion.

3 Neket ouz nao pe zek pec'hed
Em eus, en deiz-man, kounnar ;
War gement pec'hed am eus grêt
En em astenn va glac'hар ;
Ha ken bras eo ar glac'hар-ze
Ma karfen gwelloc'h mervel,
Kentoc'h eget mont adarre
War hent ar pec'hed marvel.

4 Dre ar pec'hed, o va Doue,
E-kollan ar baradoz ;
N'em eus nemet ifern goude,
Puns an ifern da c'hortoz :
Rak-se ouz va holl bec'hejou
Em eus kaiz a gasoni,
Ha, gant goulvan hag hirvoudou,
Ho pedan d'am fardoni.

5 Bras-bras eo va glac'hар dreist-holl,
Abalamour, va Jezuz,
Oun bet, dre va buhez diroll,
Kiriek d'ho poaniou skrijus :
En abeg d'in oc'h bet fouetet,
Kurunet a spern garo,
Hag ouz eur groaz oc'h bet tachet,
Evit gouzany ar maro.

6 Keuz bras am eus, Doue, va Zad,
Da veza ho klac'haret,
Abalamour c'houi 'zo ken mat,
Ken din da veza karet !
O ! me 'poanio hiviziken
Da stourm ouz va gwall youlou,
Ha biken mui, o, nann, biken !
Ne dorrin ho lezeninou.

AR GOURC'HEMENNOU

Ton : *Oui, nous le jurons.*

Diskan : *Ya, ni a viro* } bis
Lezenn Doue ato, ato ! }

1 Dalc'hit sonj mat, va breur, va c'hoar,
C'houi 'zo aman, war an douar,
Evit heulia lezenn Doue,
Ha beza salvet evelse.

2 Selaouit piz komzou Jezuz,
Rak e gentel a zo nerzus :
« Ar re am c'har e gwirionez
« A ra bepred va bolontez.

3 « Ma fell d'eoç'h kaout, gant va bennoz.
« Digor eun deiz em baradoz,
« Heuilhit ervat va lezeniou,
« O vale striz war va roudou. »

4 C'houi 'adoro Doue bemdez,
Dre feiz, esperans, karantez
Ha vertuz a relijon,
Birvidik-bras en ho kalon.

5 C'houi 'ziwallo da vlasfemi,
Da doui 'ha da zroukpédi,
Ha d'ar veuiou ho piye grêt
C'houi a zalc'ho gant lealded.

6 Da sul, da vouel, selaouit mat,
C'houi 'ehano da labourat,
Ha c'houi a glevo, penn-da-benn,
Gant mil resped an oferenn.

7 Tadou, mammou, d'ho pugale
Deskit abred lezenn Doue ;
Krennit nerzus ho zechou fall
Ha roit d'ezo skouer didamall.

- 8 C'houi, bugale, eus a bep oad,
Karit ho mamm, karit ho tad,
Gant doujans vrás outo sentit,
En o ezomm o sikourit.
- 9 O kristenien, klevit ive :
Difenn ho peus, a-berz Doue,
Da laza tud, da skei warno,
Ha da c'hoantaat gwalleur d'ezo.
- 10 Chomit, a-gorf hag a-ene,
Dinamm atao dirak Doue ;
An tech hudur a strink, a-vern,
E sklavourien 'barz an ifern.
- 11 En han' Doue, na laerit ket,
Ha na c'hoantait trau den ebet ;
Mar 'peus grêt koll da Ber pe Baol,
Hastit buan mont da restaol.
- 12 Na lavarit geier morse :
Ar gaou a denn malloz Doue ;
Ha diwallit da zroukprezeg,
O kaout en dud tri mil abeg.
- 13 Da vihana, eur wech ar bloaz,
Ha dindan boan a bec'hed bras,
C'houi 'dle koves eus ar gwella,
Ha, d'ar Paskou, komunia.
- 14 D'an holl deiziou a zo merket
Grit ar vijil gourc'hemenet :
O tibri kig en deiziou-ze
C'houi 'rufe goap ouz Mab Doue.
- 15 Karout ho Toue dreist pep tra,
Ha karout iveau ho nesa,
Setu aze diou garantez
A 'dle reiza hoc'h holl buhez.

WAR SAO ! BREIZIZ

Ton : Sainte Religion.

War sao ! Breiziz, war sao !
N' ema mui an amzer
Da gousket dibreder.
War sao ! Breiziz, war sao !
Da stourm a-greiz kalon
Evit ar Feiz gwirion.
Feiz sakr, ni ho karo.
Ha d'eo'ch ni a zalc'ho,
Betek pal ar maro ! (ter)

- Keit ha ma lugerno e bolz uhel an nenvou,
Ar steréd hag al loar hag an heol benniget,
Ni a gerzo divrall gant hent ar gourc'hemannou
Hag a vevo dalc'hmat 'vel gwir gatoliked.
- Keit ha ma vezò mor da luskellat Breiz-Izel,
Da floura he gouriz, da bokat d'he reier,
Kristenien e chomimp, en despet d'an holl vrezel
A ray d'ecompl an dud fall, marc'hadourien geier.
- Keit ha ma redo dour en hor steriou dudius
Ha ma kano er c'harz al labousedigou,
Ni 'redo kalonek war roudou sanctel Jezuz
Hag a gano d'ezan hor c'haera kantigou.
- Keit ha ma savo brug war gribenn hor meneziou
Ha ma tougo al lain bokedou alaouret,
Ni a viro dinamm feiz karet hor Gourdadou :
Ni 'zo eus ar ouenn dud o deus pennou kalet !
- Kentoc'h eget pléga d'an avel foll kounnaret,
An dero bras a dorr, hep chal gant ar maro ;
'Velse ni 'zaic'ho penn d'ar bed ha d'an drouk-spered:
Plega ne raimp biken ! kentoc'h ni a dorro !
- An ilio rodellet en-dro da c'har ar wézenn,
Daoust d'an amzer, diroll a jom stag mat ato ;
'Vel-se ouzoc'h Jezuz, en em stardomp dä-viken
Ha diouz ho karantez netra n'hon distago.

- 7 Ni a vo kristeniem, neket hepken dre gomzou,
Met dre an oberou skuilhet en hor buhez :
Pedenn hag oferenn, vijil ha sakramanchou...
Ni 'heilio penn-da-benn gwenojenn ar furnez.
- 8 Kenavo evit mat d'an holl c'hoariou noazus,
D'an dansou milliget, a zaon mil ha mil den !
Na glaskomp ket plijout da Satan ha da Jezuz.
Ne c'hellomp servija nemet eur mestr hepken.
- 9 Ni 'zo Bretoned yac'h, dispont e-giz hon Tadou ;
Birvi a ra ennomp kalon ar gwir soudard.
Eur Breizad hag a dro da heul ar fals-kredennou,
N'eo ket eur gwir Vreizad, n'eo nemet eur trubard !
- 10 Mez ruz d'an nep a gren, d'an trubard ha d'an nac'her !
N'eus war an douar-man netra ken divalo.
En em zalc'homp nerzus en-dro da Groaz Hor Salver,
Atao a-du gantan, er vuhez, er maro !

JEZUZ-KRIST ROUE

Ton : *Bale Arzur.*

DISKAN

*Enor ha gloar da Vab Doue !
N'hor bo ken Mestr na ken Roue,
Nemet Jezuz, 'pad hor buhe !*

- 1 Galloud an den a zo bihan : -
Teuzi a ra, teuzi buan,
E-giz ar c'hoar dirak an tan,
- 2 Galloud Jezuz a jom ato,
Krenvoch eget ar gwez dero,
Trec'h d'an avel a stourm outo,
- 3 Pelec'h emaint ar rouaned
A oa gwechall kement brudet ?
Emaint pell-zo 'barz ar wered.

- 4 Jezuz hepken 'zo eur Roue
Ha na gollo e dron morse ;
Ni a zo sur a gement-se.
- 5 Jezuz a dle beza Roue,
Pegwir ez eo *Den-ha-Doue*,
Mestr e pep lec'h, e pep mare.
- 6 Roue an holl e tle beza,
Pegwir en deus, 'vit o frena,
Skuilhet e wad, hep marc'hata.
- 7 Kalz tud difeiz o deus kredet
Ober d'ezan brezel kalet :
'Giz deliou sec'h int bet skubet !
- 8 Hag ar re fall a zo breman,
Evel chas-yud, o stourm outan,
A vo d'o zro brevet gantan.
- 9 Laret en deus : « Roue me 'zo !
Roue bepred me a vezoz,
Ha den ebet n'am diskaro !
- 10 Me 'rene dec'h ; me 'ren hirio ;
Warc'hoaz iveau me a reno.
Ha da-viken me a drec'ho ! »
- 11 Poblou ar bed, eus a bep gouenn,
Melen pe ruz ha du pe wenn,
A die senti ouz e lezenn.
- 12 Ar re zoujus 'vo digollet,
Ar re zireiz 'vo kastizet :
Jezuz-Roue 'zo lealded.
- 13 Jezuz dreist-holl 'zo madelez :
Trec'hi a-ra dre 'r garantez ;
Beva gantan 'zo levenez.
- 14 Trec'het en deus e lein ar Groaz ;
War an Aoter, trec'hi 'ra c'hoaz ;
Roue ken mat n'eus bet biskoaz.

- 15 Dindan e stur, an dud gwella,
Ar c'halonou ar santela,
'Vez mall ganto en em voda.
- 16 Na laromp ket, 'vel ar Yuzeo :
« Ne fell ket deomp dougen e yeo ! »
Trei kein d'ezan, na spontus eo !
- 17 Diskenn a ray, da fin ar bed,
Leun a c'halloud ha leun a sked,
Da varn an holl, 'giz ma vo ret.
- 18 Neuze dreist-holl, hag 'vit ato,
Jezuz-Roue a c'houncezo :
Taolomp evez, pe ni 'lenvo !....
- 19 Karomp ervat Jezuz-Doue ;
Karomp ervat Jezuz-Roue,
Ha ni 'reno gantan ive !

SAKRAMANT AN AOTER

Ton : O l'auguste Sacrement !

Diskan : Adoromp Jezuz,
En e Sakramant dudius !

- 1 O Sakramant kaer meurbed !
'Lec'h hon eus Doue da bred.
Jezuz-Krist a zo ennan :
War e gomz, kredi a ran.
- 2 Selaouit ar gourc'henn
Graet gantan da bep kristen :
« Gant va C'horf ha gant va Gwad,
Magit hoc'h ene dalc'hmat. »
- 3 Laret 'n'eus war ar bara :
« Va gwir Gorf eo an dra-ma. »
Laret en deus war ar gwin :
« Heiman eo va Gwad divin. »

- 4 Laret 'n'eus d'ar veleien,
O rei d'ezo e lezenn :
« C'houi a raio eveldoun,
Evit kaout sonj ac'hounou. »
- 5 Ar beleg, d'ar Gorreou,
A lavar e wir gomzou,
Ha raktal Jezuz-Salver
A ziskenn war an aoter.
- 6 Hep tec'hout eus an nenvou,
E teu war an aoteriou,
Hag e chom ganeomp noz-de,
Staget gant e garante.
- 7 N'eus mui na gwin na bara,
N'eus nemet Jezuz ama :
E Gorf sakr, e Wad divin,
'Lec'h ar bara, 'lec'h ar gwin.
- 8 Ema dindan ar spesou,
E doare ar sperejou :
Pa vez lodennet ar spes,
E pep tamm e chom a-bez.
- 9 Hor spered 'zo re denval,
Evit kompreñ kemend-all ;
Met p'en deus Doue komzet,
Diskredi a zo pec'hed.
- 10 'Neb a zigemer Jezuz,
En eur galon donjerus
A zo fall, evel Judaz,
Hag a vo barnet ken gwaz.
- 11 'Neb hen digerner ervat,
Eo meurbet eurus e stad :
Jezuz-Krist, o chom ennan,
'Ra nemet unan gantan.
- 12 Ra, vezo meulet Jezuz
Er baradoz dudius !
Ra vo meulet er C'halvar
Hag er Sakramant dispar !

EVIT AR GOMUNION

Ton : « *Me ho salud, Korf va Salver* »

A-RAOK KOMUNIA

Kaout feiz.

- 1 Kredi a ran, o va Salver,
En em gavit war an aoter,
Kuzet dindan spez ar bara ;
Kredi a ran hep marc'hata.
- 2 Kredi a ran, o va Jezuz,
War ho komzou ken galloudus ;
Dre an osti, Doue gwirion,
C'houi a ziskenn 'barz va c'halon.

Kaout eur galon izel.

- 3 Met, piou oun-me, o va Salver,
Evit kredi ho tigemer ?
N'oun ken nemet fallagriez,
Ha c'houi 'zo leun a santelez.

- 4 O ! nag a wech em eus treuzet
Ho Kalon-Sakr dre ar pec'hed !
Penaos neuze chom hep krena ?
Penaos kredi komunia ?

Kaout keuz d'ar pec'hed

- 5 Sellit, sellit ouz va daelou,
Pardonit c'hoaz va fec'hejou,
Eur gonz hepken, Aotrou Doue,
Ha va ene a vo pare.

- 6 Birviken mui, Salver karet,
Ne gemerin hent ar pec'hed ;
En ho toujans me a vevo,
Betek an eur eus ya maro.

Kaout fizians

- 7 Daoust d'am buhez nebeut kristen,
Ne dec'hin ket eus ho kichen :
Fizians am eus, o va Jezuz,
En ho Kalon drugarezus.
- 8 Fizians am eus : rak c'houi 'zo mat ;
Mall eo ganin ouzoc'h tostaat.
O va ene, redomp founnus
D'en em vaga ouz taol Jezuz.

Kaout karantez

- 9 O va Salver, na me ho kar !
'Vidout oc'h bet war ar C'halvar
- * Oc'h bet ér groaz teir eur amzer,
Hag e chomit war an aoter.
- 10 O va Jezuz, na me ho kar
Dreist kement 'zo war an douar !
E pep kalon c'houi 'dle beza
Ha kaout atao ar plas kenta.

GOUDE KOMUNIA

Adori.

- 1 O va ene, bezomp eürus !
Ennomp breman ema Jezuz.
Wanniomp buan prennomp an nor,
Ha chomomp sioul gant hon tenzor.
- 2 War va daoulin stouet izel,
Me hoc'h ador, Salver santel,
Me hoc'h ador, Den ha Doue,
C'houi eo va Mestr ha va Roue.

Karout.

- 3 P'am eus ar c'hras ken talvoudus
D'ho kaout ganin, o va Jezuz !
Gant levenez me a lavar :
O va Salver, na me ho kar !

- 4 Ya, 'n eur dridal e lavaran :
O va Mestr mat, nag ho karan !
Met ra gresko ennoun bemdez
Tan dudius ho karantez !

Trugarekaat.

- 5 Mil bennoz d'eo'ch, o va Doue !
Da veza deut e va ene.
Met kaer am bo trugarekaat,
N'hellin morsé ho meuli mat.
6 Sent hag aelez madelezus,
Evidoun-me, meulit Jezuz,
C'houi, dreist pep tra, Gwerc'hez Vari,
Kanit d'ezan mil meuleudi.

Kinnig.

- 7 Me a garfe, o va Salver,
Beza brokus en ho kenver
Met petra d'eo'ch 'c'hellen kinnig,
Pa n'oum nemet eur reuzeudig ?
8 Da vihana, o va Doue,
Me 'n em ro d'eo'ch korf hag ene,
Da labourat evit ho kloar,
Keit ha ma vin war an douar.

Gouleenn.

- 9 Met, me 'zo bresk, o va Jezuz,
Hag an henchou a zo risklus :
Va skoazellit eta bepred,
'Vit ma kerzin hep lamm ebet.
10 Grit ma tec'hin diouz ar pec'hed,
'Giz ma tec'hen diouz an naered,
Ha ma renin hiviziken
Buhez dinamm eur gwir gristen !

GOUEL AR PARDON

Ton : *Pitié mon Dieu.*
pe : *Cœur de Jésus, doux espoir de la France.*

*Pardon, va Jezuz,
A c'houlenномп ;
Dre ho poaniou estiammus
Ho pet truez ouzomp !*

*Kalon Jezuz, Kalon leun a druez,
Selaouit mat hor pedenn hirvoudus :
Keuz bras hon eus da bep fallagriez,
Taolit warnomp eur sell madelezus,
Pardon, pardon, o tenera Kalon !*

Pardon, pardon, Kalon Jézuz, pardon !

Ozioù da gana etre an aoter vras hag ar gador-brezeg.

- 1 O va Jezuz, gwechall tud a vilierou
A selaoue ho komzou benniget,
Darn koulskoude, nasket gant o gwall-youlou,
'Barz an dizurz a jome kaledet.
2 Koulz ha gwechall, breman c'hoaz c'houi a brezeg
Dre hoc'h Iliz e pevar ch'orn ar bed ;
Met nag a dud a ra goap ouz'ho peleg,
Hag ouz ho komz a jom bouzar bepred !

- 3 Ni hoñ-unan, ni a zo bet lezirek
Da studia lezenn hoc'h Aviel ;
Met a-vreman e labourimp kalonek
Da zeski mat ho kenteliou santel.

Etre ar gador-brezeg ha Kampr ar vadiziant.

- 4 O va Jezuz, goude gras ar Vadiziant,
Ni a oa kaer ha mignon da Zouie....
Allass ! allass ! pet gwech omp bet diskiant !
Pet gwech omp bet er voulhenn abaoe !

- 5 D'an drouk-spered ha d'e blijadureziou
Hor boa neuze trôet kein evit mat ;
Met abaoe pet gwech, dre hor pec'hejou,
Dindan e yeo omp aet d'en em lakat !
- 6 Hirio avat, 'vel da zeiz hor badiziant,
Ni a fell d'comp, gant bolonitez divrall,
Trei kein a-grenn d'ar bed ha d'an érouant
Ha chom atao kristenien didamall.
- Etre kampr ar vadiziant hag ar gador-goves.*
- 7 O va Jezuz, 'vit rei pardon d'ar pec'her,
Hoc'h eus savet Kador ar Binijenn ;
Met nag a dud a jom e-pad hir amzer
Hep dont morse da glask hoc'h absolvenn !
- 8 Pet ha pet all a ya d'ar gador-goves,
Hep anzav piz o fec'hejou marvel,
Hep keuz ebet d'o brasa fallagriez,
Na c'hoant ebet d'en em renta santel !
- 9 Ni hon-unan, hon eus iveau disprizet,
Ouspenn eur wech, Sakramant ar pardon ,
Met dizale ni 'zeuio, leun a resped.
D'hen digemer gant gwir gontrision,
- Etre ar gador-goves hag an aoter vrás.*
- 10 O va Jezuz, e sakramant an Aoter
C'houi evidomp eo Bara ar vuhez ;
Met pet ene, lezirek d'ho tigemer,
A gav gwelloc'h gouzany an dienez ?
- 11 Darn all, siouaz ! a ya da gominia
Gant kalonou leun a vreinadurez....
Pebez torfed ! rei d'ar Mignon ar gwellia
Ar pok euzus, pok an drubarderez !
- 12 Meur a hini, — skrijus eo hen lavaret, —
A gred warnoch'h astenn o c'hrabanou,
'Vit ho kwall-gas, e-giz diaoulou kounnaret...
Penaos warno ne gouez ho kurunou ?

- 13 Ni hon-unan, hon eus siouaz ! a-wechou,
Dismeganset ar Sakramant kaera.
Gouelomp, gouelomp dirak Jezuz, hon Aotrou,
Ha da-viken diwallomp d'e boania.

AN OPERENN

Ton : *Ni ho salud, Rouanez au Aelez.*

A-RACK AR GORREOU

- 1 O Kristenien, deut omp d'an oferenn,
Da gemer perz er santela pedenn,
Ha da ginnig d'an Doue galloudus
An holl vadou eus Pasion Jezuz.
- 2 En oferenn bezomp leun a evez,
Leun a zoujans, a feiz, a garantez,
Evel Mari hag ar merc'hed santel
Dirak Jezuz er C'halvar o vernel.
- 3 War an aoter, koulz ha war ar C'halvar,
Jezuz d'e Dad a ginnig e c'hlac'hар,
E gorf roget gant skourjézou flemmus,
E benñ gant spern kurunet truezus.
- 4 Kinnig a ra e dreid hag e zaostarn
Treuzet skrijus gant ibilien houarn,
E Galon baour flastret gant an anken,
E vuhez holl evit ar bec'herien.
- 5 An oferenn eo eta Mab Doue,
Gant e boaniou diskouezet adarre.
Holl draou ar bed e-skoaz eun oferenn
'Zo nebeutoc'h eget eur vogedenn.
- 6 En oferenn adoromp an Dreinded :
An Tad, ar Mab, ar Spered a C'hlanded.
Netra kerkouls ha Pasion Jezuz,
N'hell enori an tri Berson eürus.

- 7 En oferenn *trugarekaomp* Doue
 'Vit ar grasou a skuilh warnomp bemde :
 Hep hor Salver, omip paour ha reuzeudik,
 Gant Hor Salver, omp krenv ha pinvidik.
- 8 En oferenn *goulenomp mat pardon*
 Eus ar vouilhenn a vastar hor c'halon :
 Gant Gwad Jezuz ni a zo bet prenet,
 Gant Gwad Jezuz e vemp atao gwel'het.
- 9 En oferenn *goulenomp hirvoudus*
 Grasou nevez evit bale nerzus,
 Bale nerzus, harpet war hor Salver :
 Rak, dre natur, ni 'zo bresk ha dister.
- 10 En oferenn *pedomp 'vit an Iliz*,
 'Vit an Anaon a c'houzany poaniou kriz...
 Pedomp 'vit Breiz, evit an holl vroiou
 Ma vo Jezuz Mestr an holl galonou.

GOUDE AR GORREOU

- 11 War an aoter, e-lec'h gwin ha bara,
 N'eus dirazomp nemet Jezuz brema.
 Jezuz a-bez, gwir den ha gwir Doue.
 Pebez burzud ! ha pebez karante !
- 12 O va Salver, war hon daoulin stouet,
 Ni hoc'h ador gant mil ha mil resped,
 Ha ni a gan gant aelez an nenvou :
 Santel, Santel eo an Aotrou !
- 13 Ni hoc'h ador dindan spesou dister ;
 Aman ouzomp e kuzit ho splannter,
 Met er bed all, ma heuliomp ho lezenn,
 Ni ho kwelo e-kreiz ar sklerijenn.

GOUDE AR GOMUNION

- 14 An oferenn, nag hi 'zo talvoudous !
 Nag hi 'zo mat, ha kaer, ha dudius !
 Ma komprenfemp he holl finvidigez,
 E tiredfemp d'lie c'hlevout alies.

- 15 Trugarez d'eoch', o Salver benniget :
 An oferenn he deus hor c'hennerzet.
 Ni 'ya breman, laouen hor c'halonou,
 Da stourm ervat enep hor gwall-dechou.

PASION JEZUZ

War don : *Deomp d'ar garnel.*

1 Gwelomp Jezuz, Hor Salver, el liorz Olivet,
 A-stok e gorf o pedi, e Galon baour brevet :
 Ar bec'h eus hor pec'hejou a bouez kement warnan,
 M'eo ruz, gant e wad'santel, an douar dindanan !

2 Gwelomp Jezuz, Hor Salver, gant eun trubard gwerzet,
 Gwerzet 'vit tregont dinier, dre eur pok milliget.
 Hirio evit eun enor, eur bligadurig verr,
 E vez kavet kristenien hag a wérz o Salver.

3 Gwelomp Jezuz, Hor Salver, ken mat, ken truezus !
 Lopet ha dismeganset gant lamponed euzus ;
 E-kreiz e zremm e tuffont mil ha mil hudurnez ;
 'Vit eur sod e kemeront an Doue a furnez.

4 Gwelomp Jezuz, Hor Salver, dindan ar skourjezou :
 War e gorf noaz o krena, stank e kouez an taoliou ;
 E gig a zo dispennet, e wad a red founnus...
 N'eo ken nemet eur gouli, eur gouli strafuihuz.

5 Gwelomp Jezuz, Hor Salver, kurunet dizamant,
 Evel eur roue fallakr, eur roué diskiant :
 Sfern garo, hir ha flemmus 'zo sanket en e benn.
 'Vit Roue ar rôuaned o pebez kurunenn !

6

Gwelomp Jezuz, Hor Salver, kondaonet gwasoc'h c'hoaz,
 Kondaonet gant Pons-Pilat da verval war eur groaz.
 Pokat 'ra gant karantez da venveg e varo :
 Rak, gant ar vall d'hor prena, e Galon 'zo bero.

7

Gwelomp Jezuz, Hor Salver, o vont d'ar Golgota,
 Didrouz e-giz eun oanig, hep klemm eus a netra.
 Teir gwech e kouez d'an douar dindan e groaz pounner,
 Ha, war an hent a c'hlac'hар, e kay e Vamm derer.

8

Gwelomp Jezuz, Hor Salver, war lein menez Kalvar,
 E zilhad holl diwarnan diframmet gant kounnar...
 O pebez mez evitan ha pebez anken yud,
 Beza 'vel-se diwisket dirak e-leiz a dud !

9

Gwelomp Jezuz, Hor Salver, war e groaz gourvezet :
 Gant tachou bras hen stager ouz ar c'hood benniget.
 Selaouomp trouz ar morzol o skei war an houarn,
 Betek toulla treuz-didreuz e dreid hag e zaouarn.

10

Gwelomp Jezuz, Hor Salver, istribilh ouz e groaz :
 War bevar gouli mantrus eo douget e gorf noaz ;
 Ha chom a ra er stad-se 'pad teir eur e buhez.
 Piou a sonjo 'n e boaniou, hep kaout outan truez ?

11

Met, ma verv e izili gant ankeniou ken bras,
 E ene hag e galon a c'houzanv muioc'h c'hoaz :
 Holl ankeniou an holl dud, 'hed an holl amzeriou,
 Dirak Pasion Jezuz, n'int nemet c'hoariou.

12

Dre garantez evidomp, pec'hérien divalo,
 En deus evet eur c'halir ken trenk ha ken c'houero !
 Ma ne garomp anezan dreist kement 'zo er bed,
 E vezou ret lavarout n'hon eus kalon ebet.

KENTELIOU AR GROAZ

Ton : Diwar lein an touriou,
 pe : D'hor mamm, Santez Anna.

DISKAN

*Ho kroaz o va Jezuz !
 Eo banniel ar c'christen :
 Me 'vo bepred eürus
 Er bed-man d'he dougen.*

- 1 Ar groaz da bep himi
 A zo eul leor digor :
 Lennit, lennit warni,
 Ha c'houi a vo doktor.
- 2 Ar groaz war an henchou,
 D'ar c'christen a lavar :
 Evit mont d'an nenvou,
 Heuilhit hent ar C'halvar.
- 3 Ar groaz, war ar menez,
 A lavar didroidell :
 E skeul ar santelez
 Savit, savit uhel.
- 4 Ar groaz, e beg an tour,
 O tiskouez an nenvou,
 A lavar d'ar poaniour :
 Aze c'houi 'po joaiou.
- 5 Ar groaz, e-barz an ti,
 A ro kentel d'an holl :
 Ar re a sent outi
 N'hellont ket.mont da goll.
- 6 Ar groaz, war ar beziou,
 A zistruj an enkrez,
 O rei d'ar c'halonou
 Esperans ar vuhez,

- 7 Ar groaz, en holl lec'hiou,
A lavar hirvoudus :
Sonjît en ankeniou
A c'houzanvas Jezuz.
- 8 Ar groaz d'ar c'hlanvour paour
A lavar noz ha de :
Me eo an alc'houez aour
A zigor ti Doue.
- 9 Ar groaz d'an den santel
A lavar alies :
Grit c'hoaz muioc'h brezel
D'ho plegou didalvez.
- 10 Ar groaz d'an den pec'her
A lavar hep paouez :
Aman, gant ho Salver,
C'houi a gavo truez.
- 11 Ar grôaz d'an dud distur
A lavar krenv ha krenn :
C'houi 'vo kondaonet sur,
Ma ne rit pinijenn.
- 12 Karit ar groaz ato,
Hag he dougit nerzus
Diwarni c'houi 'nijo
Da varadoz Jezuz.

AR BEDENN

Ton : (e Kannad ar Galon Zakr, Eost 1930)

- 1 Ar Bedenn 'zo evel diouaskell :
Betek an nenv e ra d'ecomp sevel.
Pedomp eta, pedomp ato,
Ha d'an nenvou ni a nijo :
Ar Bedenn 'zo evel diouaskell.

2 E penn an deiz, raktal omp savet,
War-zu Doue kasomp hor spred :
Greomp gant resped, war hon daoulin,
Hor pedennou diouz ar mintin,
E penn an deiz, raktal omp savet.

3 Pa son an eur da vont da gousket,
Ni adarre 'die beza bodet,
Daoulinet-holl war leur an ti,
Dirak ar groaz, evit pedi,
Pa son an eur da vont da gousket.

4 Bep sul, bep gouel, hep digareziou,
Hon dever eo mont d'an ofisou,
Ha mont dreist-holl, a-benn-da-benn,
Da bedenn vras an oferen,
Bep sul, bep gouel, hep digareziou.

5 Pa son ar c'hloc'h taol an *Anjelus*,
Teir gwech bemdez, sklintin ha joaius,
Laromp bep tro teir gwech *Ave*,
Da saludi Mamm hon Doue,
Pa son ar c'hloc'h taol an *Anjelus*.

6 Pa gas ar c'hloc'h kelou ar maro,
Gant hirvoudou klemmus ha garo,
Pedomp evit an Anaon kêz
M'en do Doue outo truez,
Pa gas ar c'hloc'h kelou ar maro.

7 E-kreiz ar boan, e-kreiz al labour,
Greomp eur bedenn, da c'houleñn sikour :
Jezuz iveau en deus poagnet
Hag a ro skor, pa vez pedet,
E-kreiz ar boan, e-kreiz al labour.

8 Pa verv ar joa e-barz hon ene,
Laromp buan bennoz da Zoue ;
Doue 'vidomp a zo ken mat !
Ha ni a die trugarekaat,
Pa verv ar joa e-barz hon ene.

- 9 Pa deu Satan da glask hon taga,
Evel eul leon er gonnar vrasa,
Sonjomp hon eus 'vit hon difenn,
Ar c'heze krenv hanvet pedenn,
Pa deu Satan da glask hon taga.
- 10 Pa vo demdost an eur a ganvou
Ma vimp sammet gant dorn an Ankou,
Pedomp Mari, hor Mamm dener,
War he barlenn d'hon digemer,
Pa vo demdost an eur a ganvou.

AR BATER.

Ton : *Sellit piz*, pe eun all.

- 1 Hon Tad hag a zo en nervou,
Perc'henn brokous an holl c'hrasou,
Plijet ganeoc'h, hag hep dale,
Selaou pedenn ho pugale.
- 2 Ra vo, dre-holl, sanctifiet
Hoc'h hano sakr ha benniget ;
Ra zeuy an holl, e pep amzer,
D'ho servija gant kais preder.
- 3 Ra zeuy an holl, o va Doue !
D'ho tigemer evel Roue,
Evel Roue d'o c'halonou,
Evit gounit gloar an nervou.
- 4 Ra ray an dud ho polontez,
Evel m'eo graet gant an aelez,
Ho polontez hep marc'hata,
E-kreiz ar boan kouls hag er joa.
- 5 Roit d'eomp bemdez, o va Doue !
Bevans ar c'horf hag an ene :
Eun tad n'hell ket beza disaour
Da rei bara d'e vugel paour.

- 6 Pardonit d'eomp ar fallentez
Hon eus, siouaz ! graet alies,
'Vel d'ar re all e pardonomp
Ar fallentez o deus graet d'eomp.
- 7 N'hon lezit ket, o Tad karet !
Da drei a-du gant ar pec'hed,
Met diouz an droug hon diwallit,
Hag hep paouez hon difennit. Amen.

PEDENN D'AR WERC'HEZ EVIT AN ANAON

Tröet e brezoneg diwar LANGUENTIBUS

War an ton latin, pe : *Ni ho salud, Rouanez an aelez.*

- 1 War an Anaon er purgator dalc'het,
Evit paea die ponner ar pec'hed,
Hag a c'houzanv flemmou eun tan skrijus,
Taolit hirio eur sell karantezus, — O Maria !
- 2 C'houi 'zo eun dour da walc'hi pep bouilhenn ;
D'an nep ho ped c'houi a ro e c'houlenn :
Astennit 'ta ho torn d'ar re varo
A zo bemdez e-kreiz poaniou garo, — O Maria !
- 3 Betek ennoc'h e kasont o c'hlemmou,
Mall bras o deus da guitaat o foaniou,
Ha da saouri, en nenv, en ho kichen,
An eürusted a bado da viken, — O Maria !
- 4 Klevit buan o fedenn hirvoudus :
Grit ma santint ho Kalon druezus :
Grit ma teuio Jezuz, 'vel eur mignon,
D'o farea gant gwad e Basion, — O Maria !
- 5 C'houi eo bepred gwir fizians ar paourkêz ;
Rak-se aman ni 'bed ho madelez ;
Ni 'bed ho Mab, Salver an eneou,
Da rei d'hon tud levenez an nervou. — O Maria !

- 6 Daelou c'houero a skuilhomp, Mamm dener,
A skuilhomp druz e-harz treid ar Barner :
Ra vo drezo tan ar gastiz mouget,
Hag an Anaon d'ar baradoz galvet ! — O Maria !
- 7 Ha pa 'z aimp-ni dirak lez-varn Doue,
En eur grena da renta kont ive,
Evidomp-holl pedit ho Mab-Barner
E renk ar sent da rei d'eomp digemer. — O Maria !

NEDELEG !

Ton : *In cordis jubilo.*
DISKAN

*O ! nag omp evurus
Da gana d'ar Mabig-Jezuz
Eur c'hantik dudius !*

- 1 Allez a gan a villerou, Alleluia !
Ken a dregeren bolz an nenvou, Alleluia, alleluia !
- 2 Pastored paour a red buan,
Betek eur c'hraou izel ha mioan.
- 3 Tri roue bras, eus a bell-bro,
A zo en hent, ha tiz warno.
- 4 Peseurt eta 'zo a nevez ?
Peseurt kelou a levenez ?
- 5 Selaouit mat ha c'houi 'glevo,
Ha plijadur c'houi a gavo.
- 6 Mab Doue 'zo en em c'hrêt den,
E-kreiz an noz tenval ha yen.
- 7 Gant eur Werc'hez ez eo ganet,
E-barz eûr c'hraou, etre loened.
- 8 Mabig-Jezuz eo e hano ;
Hano ken kaer biken ne vo.

- 9 War eun tamm plouz eo gourvezet,
Gant an avel eo luskillet.
- 10 O ! nag ez eo mignon ha koant !
O ! nag ez eo seder ha drant !
- 11 Bleo melen flour 'zo war e benn,
Ha rôdellet meur a guchenn.
- 12 E zaoulagad glas ha tener
A zell ouzomp, leun a zouster.
- 13 E zioujodig 'zo fresk ha fin,
'Vel diou rozen diouz ar mintin.
- 14 Mousc'hoarz laouen e vuzellou.
A ra tridal hor c'halonou.
- 15 Diskennet eo 'vit an dud vat,
Gant grasou puilh d'o santelat.
- 16 Diskennet eo 'vit an dud fall,
D'o rents fur ha didamall.
- 17 Diskennet eo, evel Salver,
Evit paea dle ar pec'her.
- 18 Setu perak an holl a dle
Kana bennoz da Vab Doue.
- 19 Mabig-Jezuz, ni ho karoo
Ha da viken ni ho meulo.

AR BRIEDELEZ KRISTEN

Ton : *Kavet em eus ar peoc'h,*
pe : Je suis venu parmi vous

- 1 Gwelet e voe, eun deiz e kêrig Kana,
Salver ar bed hag e Vamm, ar Werc'hez,
Ouz taol o daou en eun eured o leina,
'Vit benniga stad ar briedelez.

DISKAN

O va Salver ! prizit, evel e Kana,
 D'an dud nevez } rei aman ho pennoz,
 D'ar priejou
 Ma vint nerzus da heulia, hep ehana,
 Hent ar furnez betek ar baradoz.

- 2 Doue gwechall 'zimezas hon tud kenta :
 « C'houi, emezan, 'zo an eil d'egile ;
 Gant va bennoz grit mat ho tever eta,
 Lakit er bed e-leiz a vugale. »
- 3 Ar pez 'so bet gant Doue gourc'hemennet.
 Ne c'hell morse, hervez komz Hor Salver,
 Beza goudre gant den ebet dispennet :
 Betek mervel dimezet e chomer.
- 4 Gwir sakramant ez eo ar briédelez
 En e Iliz gant Mab Doue savet ;
 Ret eo diwall da saotra e santelez :
 Hep an dever plijadur 'zo pec'hed.
- 5 O va Jezuz ! skoazzellit ar priejou,
 En o c'halon lakit gwir garantez,
 Ma kavint nerz, hed-ha-hed o bloaveziou,
 Da zougen mat samm ar briédelez.
- 6 Ra vo 'n o zi bugaligou niverus,
 En-dro d'ezo e-giz eur gurunenn,
 Desket abred da veva fur ha doujus
 Hervez Doue hag hervez e lezenn.
- 7 Grit na vint ket dispartiet hep dale,
 Ha ma welint, a-barz o zremenvan,
 Neket hepken bugale o bugale,
 Met bugale o bugale vihan.
- 8 Ha pa rankint, eun deiz e pal o buhez,
 Diouz an douar kimidi da viken,
 Grit ma savint, o tridal gant lèvenez,
 D'ar baradoz e-lec'h n'eus mui anken.

A - RAOK KUITAAT AN ILIZ
 D'AN ABARDAEZ - NOZ

Ton : Avant de quitter notre Maître.

- 1 A-barz ho kuitaat, o va Jezuz !
 En em daolan en ho Kalon :
 Ganec'h e vevan bepred eürus,
 Hag e kavan ar peoc'h gwirion.
 A-barz ho kuitaat, o va Jezuz !
 En em daolan en ho Kalon.
- 2 O Gwerc'hez Vari ! mamm druezus,
 Kenavo d'eo'h ha nozvez vat ;
 Ra blijo ganeoc'h ha gant Jezuz
 Dont en noz-man d'am luskellat.
 O Gwerc'hez Vari ! etc. (*evel er poz kenta*).
- 3 Aotrou Sant Josef ! chomit ato
 D'am skoazella e-giz eun tad ;
 Ha pa zigouezo eur va maro,
 Deut da gloza va daoulagad.
- 4 O Aelig Doue ! mignon santel,
 Pellait ouzin an drouk-spered ;
 Astennit warnoun ho tiouaskell,
 D'am goudori, pa vin kousket.
- 5 O Tad ar bariez ! Patron karet, (1)
 Skuilhit warnoun gliz ho pennoz,
 Ha grit ma vezin digemeret
 En ho kichen er baradoz.
- 6 Ouz Anäon klemmus ar purgator,
 O va Doue ! ho pet truez :
 D'ezo, hep dale, roit dor zigor
 Da vont da vro al levenez.

1) Mar deo eur santez, e va kanel : O Mam'm ar barrez! Santez karet, etc. Pe lakat o bano, mar geller.

TAOLENN

	<i>Pajen</i>
A-barz ho kuitaat.....	31
Adoromp Jezuz.....	12
Ar bedenn.....	24
Ar groaz.....	23
Dalc'hit sonj.....	7
Dirak ho kroaz.....	5
Enor ha gloar.....	10
Gwelet e voe.....	29
Gwelomp Jezuz.....	21
Hon Tad.....	26
Klevit, kristenien.....	14
Kredi a ran.....	14
O kristenien.....	19
O ! nag omp.....	28
O va ene.....	15
O va Jezuz.....	17
Selaouit holl.....	2
Spontus meurbed.....	3
War an Anaon.....	27
War sao.....	9



Imprimatur:

Kemper, 5o. Eost 1931

P. JONCOUR, vikel-vras.

Evit kaout ar chantikou, skriva
28 Avenue de la Marne, LORIENT.

Oriant, moulerez Ar BAYON-ROGER.